



## **EMVOD MEUR ROUEDAD DIWAN 2020**

## **ASSEMBLÉE GENERALE RESEAU DIWAN 2020**

**Sal Glenmor - Karaez**

**Salle Glenmor - Carhaix**

### **EMVOD MEUR AMPELLAET**

Deiziet e oa bet e vije bet aozet emvod-meur Diwan d'ar 25 a viz Ebrel e skolaj Plijidi. Abalamour da enkadenn ar c'horonaviruz, n'hon eus ket gellet derc'hel gant an deziad-mañ. Divizet eo bet a-benn ar fin lakaat an emvod da vare kuzul ar skolioù, skolajoù hag al lise, da lavaret eo d'ar 27 a viz Even.

### **REPORT DE L'ASSEMBLEE GENERALE**

L'assemblée générale devait se tenir le 25 avril au collège Diwan de Plésidy. La crise du coronavirus nous a contraint à changer la date. L'assemblée générale sera organisée le jour du conseil des écoles, des collèges et du lycée, soit le 27 juin.



### **RENTAÑ KONT HOLLEK 2019**

Rapport moral 2019 p.2

### **RENTAÑ KONT OBEREREZH 2019**

Rapport d'activité 2019 p.4

### **RENTAÑ KONT AN TEÑZORER 2019**

Compte-rendu du trésorier 2019 p.14

### **ROLL LABOUR AN EMVOD MEUR**

Ordre du jour de l'assemblée générale p.16

COVID-19

## **Koronaviruz**

**Ampellaet e vo an emvod-meur  
L'assemblée générale est reportée**



# RENTAÑ KONT HOLLEK 2019

## RAPPORT MORAL 2019

**E**n holl yezhoù ar blanedenn ez eus bet degemeret ur ger nevez er goañv 2019-2020 : Koronaviruz. Ur ger evit envel ur viruz a orin anevaled. Ur ger a lak en arvar yec'hed milionoù a wazed hag a vaouezed. Ur ger hag a lak diaes hor buhez pemdeziek hag e dañjer gwirioù miliardoù a dud.

Pa erru kleñved-red ar c'horonaviruz eo da gentañ skolioù An alre, Baod ha skolaj Gwened a oa bet ranket serriñ e penn kentañ miz Meurzh ha war-lerc'h evit abegoù yec'hed eo bet serret skolioù all ar rouedad ha nullet obererezhioù ar c'hevredigezhioù desevel poblek hag ar c'huzulioù skoazell.

Goude ar souezhadenn n'omp ket chomet abafet ha pep hini en deus graet e lod evit talañ ouzh an enkadenn. Ober ma c'hello ar skolidi kenderc'hel gant al labour skol, degemer en doare gwellañ posupl bugale tud a ra war-dro ar re glañv, derc'hel goprou implijidi Diwan hag ar skolioù, skoazellañ ar familhoù deuet da vezañ oberiant da vat e skoliata o bugale.

E fin miz Meurzh, emaomp en entremar da vat : Peur e vo digoret ar skolioù en-dro ? Peur e c'hellimp bodañ an emvod meur ? Penaos derc'hel kontoù ar skolioù kevredigezhel kempouez tra ma erruo un enkadenn ekonomikel bras ? Ha dreist-holl, daoust hag e vimp holl yalc'h goude ar gorventenn ?

Sur omp avat eus traoù a c'heller en em harpañ warno. Tud Diwan a ra o lod evit degemer bugale ar re a intent ouzh ar re glañv e-kerzh an devezhioù skol, un dra anat evit ur rouedad a heuilh pennaennoù servij publik an deskadurezh. Lakaat e pleustr ar c'hendalc'husted pedagogiezh setu un dra a zo bet kaoz da geñver al labourioù stroll e Breujoù Diwan ma hor boa prederiet war pennaennoù ar servij publik : kendalc'husted, kevatalded hag asazaat.

Gwelout a reomp ivez eo gwallgaset hor raktres pedagogiezh, diazezet war ar soubidigezh e brezhoneg abalamour d'ar skoliata er gêr. Met un digarez eo a-benn ar fin evit kreñvaat plas ar brezhoneg er gêr. En ur ambroug o bugale e c'hell tud ar vugale lakaat un tamm muioc'h a vrezhoneg en o buhez pemdeziek.

**D**ans toutes les langues de la planète, l'hiver 2019-2020 a fait entrer un nouveau mot dans le langage courant : Coronavirus. Un mot qui désigne un virus d'origine animale. Un mot qui met en péril la santé de millions d'hommes et de femmes. Un mot qui bouleverse le quotidien et menace les droits de milliards de personnes.

L'épidémie de coronavirus s'est emparée de nos écoles au début du mois de mars, d'abord à Auray, Baud et au collège de Vannes avant que, pour d'évidentes raisons sanitaires, soient fermés tous les établissements, annulées toutes les activités associatives des associations d'éducation populaire et des comités de soutien.

La surprise n'a pas laissé la place à l'hébétéude et chacun a pris sa part pour faire face à la situation : permettre aux élèves de continuer à apprendre, accueillir dans les meilleures conditions possibles les enfants des personnels soignants, préserver les rémunérations des salariés de Diwan et des établissements, soutenir les familles devenues parties prenantes des apprentissages de leurs jeunes.

A la fin du mois de mars, les incertitudes sont immenses : Quand reprendra l'école ? A quelle date pourrions-nous réunir l'assemblée générale ? Comment assurer l'équilibre financier de nos écoles associatives alors que se dessine une crise économique majeure ? Et surtout, après la tempête, serons-nous tous en bonne santé ?

Quelques certitudes émergent comme autant de points d'accroche. Les gens de Diwan contribuent aux efforts de tous pour accueillir les enfants des personnels soignants pendant les journées de classe, une évidence pour un réseau qui s'inscrit dans le service public de l'éducation. La mise en place de la continuité pédagogique fait écho aux travaux collectifs de 2017 quand, lors des Assises de Diwan, nous avons planché sur les principes du service public : continuité, égalité et adaptabilité.

Nous voyons aussi notre projet pédagogique, fondé sur l'immersion en breton, sérieusement mis en cause par l'école à la maison. Mais cette expérience devient paradoxalement l'occasion de renforcer la langue bretonne dans nos foyers. En même temps que les parents peuvent guider leurs enfants dans leurs apprentissages, ces circonstances peuvent les conduire à se donner le temps de vivre - en breton - des moments du quotidien.

E kreizig-kreiz hor rouedad skolioù emañ ar gwirioù Mab-den, dreist-holl ar gwirioù sokial ha sevenadurel. Gant ar c'hleñved-red Covid-19 e rankomp soñjal e pennaennoù ar gwirioù-mañ. Hervez Aozadur ar Broioù Unvan eo hollvedel gwirioù Mab-den met ivez dirannus ha kenlevezonet. Ar pezh a dalv n'eus renk ebet etre ar gwirioù. Raktreset vez avat en testennoù etrevroadel e c'hell abegoù yec'hed reizhaat strizhadurioù amzeriat war frankizoù zo (dilec'hiañ, ezteurel, kevredigezh).

Neuze pa emgavo an diskuizh evit an holl re a intent ouzh ar re glañv, pa zeuio pep hini er maez eus e lec'h kenfinañ, pa zigorimp ar skolioù en-dro, en do cheñchet stad an traoù. Moarvat ne ouezimp ket war be du treiñ evit diskoulmañ an holl gudennoù. Neuze hor bo ezhomm da gavout an nerzh evit kregiñ en-dro gant al labour hag a-nevez, talañ ouzh diaezamantoù dec'h ha difenn an diskoulmoù bet kavet dija.


Aze e komzan eus al labour a-feson a gasomp abaoe 2017 evit derc'hel padus implijoù nann gelennerien hor skolioù. Peseurt bennak vefe an degouezhioù eo reizh evit hor skolioù da gaout ar skodenn skol raktreset e lezenn Blanquer miz Gouere 2019. E 2020 e tlefemp sinañ ur c'henemglev gant ar Stad hag ar C'huzul rannvro ; daoust da strafuilh ar c'hleñved-red e vimp war evezh ma talc'ho kont eus hor palioù ha ma skoazello hor skolaerien, hor goprider, hon tud a-youl vat hag hor skolidi.

Stephanie STOLL  
Prezidantez Diwan

Les droits humains, notamment les droits sociaux et culturels, figurent au cœur des préoccupations de notre réseau d'écoles. La pandémie du Covid-19 doit aussi nous interpeller sur les principes de ces droits. En effet, selon l'Organisation des Nations Unies, les droits humains sont universels mais aussi indissociables et interdépendants ; cela veut dire qu'il n'y a pas de hiérarchie entre les droits. Toutefois, les textes internationaux prévoient aussi que les conditions sanitaires peuvent justifier des restrictions temporaires à certaines libertés (déplacement, expression, association).

Alors, quand le répit viendra pour tous ceux qui soignent, quand chacun sortira de son confinement, quand nous réouvrirons nos écoles, le contexte aura changé. On peut craindre que l'ampleur des problèmes à surmonter alimente la concurrence entre eux. Nous aurons alors besoin de trouver les forces pour reprendre l'ouvrage là où il était, pour à nouveau, affronter les difficultés d'hier et pour défendre les solutions déjà bâties.

Je veux parler du formidable travail que nous menons depuis 2017 afin de pérenniser les emplois non-enseignants de nos écoles. Quelles que soient les circonstances, nos écoles sont légitimes pour obtenir le versement du forfait scolaire prévu par la loi Blanquer de juillet 2019. En 2020, nous devrions signer une convention avec l'Etat et le conseil régional ; malgré les bouleversements de l'épidémie, nous veillerons à ce qu'elle tienne compte de nos enjeux de terrain et qu'elle conforte nos enseignants, nos salariés, nos bénévoles et nos élèves.



# RENTAÑ KONT OBEREREZH 2019

## RAPPORT D'ACTIVITE 2019

### 1. Statud : Evit ma vo anavezet gwelloc'h kefridioù a servij publik Diwan :

Strivañ a ra c'hoazh ar rouedad evit ma vo anavezet labour Diwan e-keñver servij publik. Ar c'hinnigoù bet savet a-stroll ganeomp e 2017-2018 da-geñver breujoù Diwan a zo stur ar stourm.

#### Lakaat da badout an implijoù nann-gelennerien :

Goude ar Gevrat evit an Ober Publik e Breizh hag al Lezenn evit skol ar fiziañs en deus lakaet nerzh Diwan evit kavout doareoù all da arc'hantañ implijidi ar skolioù. Pal ar jeu a zo kavout peadra da arc'hantañ koskor hollek an implijidi, da lavaret eo 1,3 million a eurioù hervez jedadenn miz here 2017.

Ar sammad se a c'hellfe bezañ paeet (pe dost) a drugarez d'ar skodennoù skol evit kement bugel eus un tu (lezenn evit ur skol a fiziañs), hag eus un tu all gant ar yalc'had a 300 000 € d'ar rouedad da-geñver ar gevrat evit an ober publik e Breizh.

#### Ar skodennoù skol :

An ali a du oa bet embannet gant kendalc'h tiriadel an ober publik, en e benn prezidant ar Rannvro, e miz Ebrel 2019, diwar-benn ledanaat ar skodennoù skol d'ar skolioù divyezhek. Adalek ar mare-se e oa bet prezidantez ha renerez Diwan war evezh gant labour ar senedourien hag an deputeed evit ma vo lakaet ar c'hinnig se el lezenn evit ur skol a fiziañs.

**Liammoù ingal gant ar prefeti :** gouzout penaos e vo lakaet e pleustr al lezenn, dreist-holl evit ar pezh a sell ouzh labour ar brefeded da gavout emglevioù gant an tiez-kêr o do nac'het paeañ.

**Sevel ur fichenn bleustrek ha lizhiri skouer ha skignañ anezho d'ar skolioù.** Ul labour gant ar rouedad zo bet kaset da benn evit kinnig d'ar skolioù binviji pleustrek da c'houlenn ar skodennoù skol hervez an doare nevez.

Heuliet e vez ar pezh a resev ar skolioù digant an tiez-kêr (**emañ un enklask en linenn** er mare mañ) kuit ma vefe kudennoù hag evit kelaouiñ ar prefeti rannvro pa vo ket tu d'en em glevet.

### 1. Statut : Pour une meilleure reconnaissance des missions de service public de Diwan :

Les efforts pour que soient mieux reconnues les missions de service public de Diwan continuent pour porter les propositions élaborées collectivement en 2017-2018 dans le cadre des Assises de Diwan.

#### Pérennisation des personnels non enseignant :

Dans le cadre du contrat pour l'action publique en Bretagne, puis de la loi sur l'école de la confiance, le réseau s'est mobilisé pour trouver une alternative au financement des employés non-enseignants. L'objectif étant de financer le coût global de cette masse salariale, c'est-à-dire 1,3 € millions selon l'estimation d'octobre 2017.

Ces 1,3 € million pourraient être couverts par le versement du forfait scolaire pour (presque) tous les élèves d'un côté (loi école de la confiance) et par la subvention de 300 000 € au réseau dans le cadre du contrat pour l'action publique en Bretagne.

#### Le forfait scolaire :

La conférence territoriale d'action publique présidée par le président du Conseil régional a émis, en avril 2019, un avis favorable à l'élargissement du forfait scolaire aux écoles bilingues. La présidente et la directrice de Diwan ont alors suivi étroitement les travaux des sénateurs et des députés pour que la disposition soit inscrite dans la loi pour une école de la confiance.

**Liens constants avec la préfecture :** l'objectif est de savoir comment va se mettre en œuvre concrètement la loi, notamment en cas d'arbitrage préfectoral en cas de refus des communes.

**Réalisation d'une fiche pratique et de courriers types diffusés aux écoles.** Un travail du réseau a permis de proposer aux AEP des outils concrets pour faire leur demande de forfait scolaire selon les nouvelles dispositions.

Suivi des versements aux écoles (**enquête en ligne auprès des écoles** en cours) afin d'éviter les contentieux et d'informer la préfecture de région des défauts d'accord.

**Ar yalc'had d'ar rouedad :** E-giz ma oa bet lavaret da vare sinadur ar gevrat ober evit Breizh, hon eus bet ur yalc'had nevez a 300 000 €. Labourer a zevri zo bet graet evit kavout un doare dasparzhañ reizh eus an arc'hant se d'ar skolioù. Divizet ez eus bet dezverkoù jediñ resis. Dre vras hon eus gallet digreskiñ a galz an arc'hant a vez goulennet digant ar skolioù. E miz C'hwevrer 2020 he deus ar brefedez Rannvro embannet dirak ar c'huzul rannvro e vije paeet c'hoazh ar yalc'had-se bep bloaz.

**Darempred gant ministr an deskadurezh stad :** E miz Kerzu 2018 e oa bet gwelet Jean-Michel Blanquer gant ar brezidantez hag ar renerez. Da c'houde-se e oa bet kefridiet un enseller meur da studial frammoù ar rouedad (skol Roazhon ha Gwened, skolaj Gwened ha Kemper ha lise Karaez). N'eo ket bet kaset deomp c'hoazh danevell an enselladenn daoust m'eo bet goulennet meur a wech.

Pa oa deuet Jean-Michel Blanquer da Benn-ar-Bed d'an 29 a viz Du e oa bet degemeret Stéphanie Stoll gantañ, asambles gant ar rektor. Lakaet e oa bet ar gaoz dreist-holl diwar-benn aesaat kevratid ar skolioù kerkent ha digoret. Anv zo bet ivez eus ar skodennoù skol ha penaos e ranker muzuliañ efedusted pe get lezenn ar skol a fiziañs war an dachenn-mañ.

**Cheñchamant ar feur skoazell evit an implijoù PEC :** 50 % eo ar feur broadel evit an implijoù PEC. Abaoe 2017 avat, e oa ar feur se evit Diwan (hag an deskadurezh katolek) a 70 %. Abaoe ar c'hentañ a viz Genver 2020 eo bet lakaet feur Breizh d'al live broadel, da lavaret eo 50 %.

**Raktres Strollad a Laz Foran (SALF) evit al lojeiz :** E miz Genver 2020 ez eus bet un emvod e Gwengamp evit en em soñjal war un danvez SALF war ar savadurioù skol diwar skouer skolaj Plijidi. Loc'het e vije an traoù diwar un ti bennak a-raok o raktresañ diouzhtu gallet ober gant an ostilh-se evit strollegezhioù lec'hel all.

**La subvention au réseau :** Comme annoncé lors de la signature du contrat d'action publique pour la Bretagne, le réseau a touché cette année la première subvention annuelle de 300 000 €. Un travail important a été mis en œuvre pour définir les modalités de répartition de cette somme au profit des écoles. Des critères de calcul ont été définis. Globalement, les participations financières des écoles au réseau ont pu être diminuées de manière significative. En février 2020, la préfète de région a annoncé au Conseil régional que cette subvention serait maintenue les années suivantes.

**Echanges avec le ministère de l'éducation nationale :** Suite à la rencontre de la présidente et de la directrice avec Jean-Michel Blanquer, en décembre 2018, un Inspecteur général a effectué, en avril, mai 2019, des visites dans les établissements du réseau (écoles de Rennes et Vannes, collèges de Vannes et Quimper, lycée de Carhaix). Le rapport d'inspection n'a pas encore été communiqué au réseau malgré de nombreuses relances.

A la faveur de la visite de Jean-Michel Blanquer en Finistère, le vendredi 29 novembre, Stéphanie Stoll a été reçue par le ministre, en présence du recteur. Les demandes ont porté sur une facilitation pour contractualiser immédiatement les nouveaux établissements. Il a aussi été question du forfait scolaire et de la nécessité de mesurer l'efficacité ou non de la loi de l'école de la confiance dans ce domaine.

**Modification du taux d'aide des emplois PEC :** Le taux d'aide national aux PECs est de 50%, mais depuis juillet 2017, les emplois aidés des écoles Diwan (et de l'enseignement catholique) bénéficiaient en Bretagne d'un taux d'aide de 70%. Depuis le 1er janvier 2020, les règles nationales s'appliquent en Bretagne aussi et le taux d'aide aux écoles Diwan retombe à 50%.

**Projet de groupement d'intérêt public (GIP) pour les locaux :** Une réunion de travail s'est tenue en janvier 2020 à Guingamp pour préfigurer un GIP pour les locaux scolaires à partir du collège de Plésidy. L'idée est de démarrer sur un établissement en envisageant dès le départ l'utilisation de cet outil par d'autres collectivités locales.

## 2. Ar skolioù :

### Sifroù ar rouedad :

- 48 skol, 6 skolaj, 1 lise, 1 greizenn stummañ,
- 4307 skoliad, 3 063 er c'hentañ derez ha 1234 en eil derez, da lavaret eo 30 skoliad nebeutoc'h eget e miz Gwengolo 2018. En eil derez emañ ar c'holl dreist-holl
- 42 skolaer titlet Diwan (115,4 etp), 125 skolaer titlet Deskadurezh Stad kentañ derez (115,4 etp), mui 37 vakater (31 etp),
- 123 kelenner eil derez (100,5 etp), en o zouez 73 titlet DS, 50 nann ditlet paeet DS,
- 67 kasour eil derez (48,59 etp),
- 26 post er melestradur (23,64 etp), 13 anezho er skolajoù ha lise.

### Ar raktresoù :

#### Raktresoù skol :

Kinniget ez eus bet savadurioù gant Ti-kêr Kemper evit digeriñ un trede skol Diwan. **Kemper 3** a c'hellfe bezañ digoret a-benn miz Gwengolo 2020.

Raktres skol **Kernitron-al-Lann (44)**. E kuzul merañ miz C'hwevrer e oa bet sinet ar gevrat rouedad gant ar re e karg eus ar raktres lañset e miz Even 2019. Ar re-mañ a garfe digeriñ ar skol en distro-skol 2020 pe 2021, diouzh ar savadurioù a gavint.

Ur rakres skol e **Saozon-Sevigneg (35)** zo o paouez bezañ lañset : un emvod publik, un emgav gant ar maer, n'o deus ket izili ar c'huzul skoazell goulennet sinañ ar gevrat rouedad evit poent.

#### Raktresoù en eil derez :

Daoust da galz a eskemmoù gant kuzul departamant Il-ha-Gwilen hag ur skolaj savet e **Guipry-Messac** gant savadurioù prest da zegemer skolaj Diwan Il-ha-Gwilen, ne c'hello ket digeriñ a-benn miz Gwengolo 2020.

Digoret e vo ur **c'hlas eilvet e Gwened** a-benn an distro-skol 2020. Dont a ra ar skolaj da vezañ ur skolaj-lise. An dilojamant er savadurioù nevez a zlefe bezañ graet e 2021.

Ur c'huzul skoazell zo bet krouet evit studiañ hag eñ e c'heller staliañ un **adskolaj en Aodoù an Arvor** war takad bro Lannuon.

## 2. Les établissements scolaires :

### Le réseau en chiffres :

- 48 écoles, 6 collèges, 1 lycée, 1 centre de formation
- 4307 élèves, 3063 en primaire et 1234 en secondaire, soit - 30 élèves par rapport à septembre 2018. Pertes essentiellement dans le secondaire,
- 42 (115,4 etp) enseignants titulaires Diwan (115,4 etp) , 125 enseignants titulaires éducation nationale premier degré (115,4 etp), auxquels s'ajoutent 37 vacataires (31 etp),
- 123 professeurs second degré (100,5 etp), dont 73 titulaires EN, 50 non titulaires payés EN,
- 67 animateurs du second degré (48,59 etp),
- 26 agents administratifs (23,64 etp), dont 13 dans les collèges et lycée.

### Les projets :

#### Projets d'écoles :

La mairie de Quimper a proposé des locaux pour l'ouverture d'un troisième site Diwan. **Quimper 3** pourrait donc ouvrir en septembre 2020.

Projet d'école à **Notre-Dame-des-Landes (44)**. Les porteurs du projet, lancé en juin 2019, ont signé la convention de réseau au conseil d'administration de février 2020. Ils souhaiteraient ouvrir l'école à la rentrée 2020, ou en 2021, selon les locaux qu'ils trouveraient.

Début d'un projet d'école Diwan à **Cesson Sévigné (35)** : une réunion publique, une rencontre avec le maire, le comité de soutien n'a pas encore demandé officiellement à signer la convention de réseau.

#### Projets d'établissement de second degré :

Malgré de nombreux échanges avec le conseil départemental d'Ille et Vilaine et la construction d'un nouvel établissement à **Messac-Guipry**, avec des locaux prévus pour accueillir le collège Diwan d'Ille-et-Vilaine, cet établissement ne pourra pas ouvrir en septembre 2020.

L'ouverture d'une première **classe de seconde à Vannes** va se faire à la rentrée 2020. L'établissement devient donc un collège-lycée. Le déménagement dans les nouveaux locaux devrait se faire en 2021.

Un comité de soutien a été créé pour étudier la faisabilité d'une **annexe du collège des Côtes d'Armor** dans la région de Lannion.

**Servij pedagogiezh ar c'hentañ derez :** Obererezhioù kaset gant ar servijoù pedagogiezh ar c'hentañ derez a zo ar re-mañ :

- Kuzulioù d'ar skolaerien ha d'ar renerien ma vez ezhomm,
- Klask nevez gelennerien pe erlec'hidi,
- Darempredoù gant ar familhoù a c'houlenn kejañ ganto,
- Eveshaat ouzh ar raktres diwan, ar c'helenn dre soubidigezh

Ouzhpenn d'ar c'hefridioù-mañ hag asambles gant kuzul pedagogiezh ar c'hentañ derez e vez aozet gant ar servijoù pedagogiezh darvoudoù a sell ouzh ar raktres Diwan. Er framm-mañ o deus kemeret divizoù ha labouret war ar raktresoù amañ da heul :

- Priziadennoù CP ha CE1 ar Stad,
- Reolennaoueg ar c'huzul skol,
- Priziadennoù e brezhoneg skolidi CM1,
- Emvodoù lec'hel ar skolaerien,
- Dafarioù pedagogel : levr brezhoneg ar c'helc'hiad 3 da skouer, mui dafarioù all lakaet en linenn ingal war lec'hienn Internet ar skolaerien...

**Eil derez :**

**Skolaj Gwiseni :** Ur raktres 1 600 000 euro zo evit sevel ur skol-lojañ dre ar gevredigezh Ti an Aod, gant yalc'hadoù publik a sav da 560 000 euro hag un amprest asantet gant an tiez bank a sav da 800 000 euro, chom a ra 240 000 euro da arc'hantañ. Bout e chom ar raktres dre ma vank un tamm youl digant ar c'humuniezh kumunioù evit poent. Da c'hortoz ez aio ar skolajidi da gousket war daou lec'h e maez Gwiseni.

**Skolaj Kemper :** Kaset eo bet ar skol-lojañ d'an Enez-Tudi. Lañset ez eus bet ur raktres skol-lojañ e Kemper.

**Bak e brezhoneg :** Tremenet o doa 15 lisead o arnodenn matematik e brezhoneg e miz Even 2019. Nebeutoc'h a vrud zo bet er c'hazetennoù. E penn kentañ miz Gouere o doa ar c'hevredigezhioù sevenadurel kaset ul lizher d'ar Rektordi. Respontet en doa e oa kizidik ouzh se hag un emvod labour a oa bet dalc'het d'an distro skol. D'an 11/12/2019 en doa Jean-Michel Blanquer disklêriet e roe an aotre da arnodiñ ar matematikoù e brezhoneg met nac'het en doa un nebeud eurvezhioù war-lerc'h.

**Le service pédagogique du premier degré :** Les principaux terrains d'action des services pédagogiques du premier degré sont :

- Le conseil aux enseignant.e.s et aux directeur.rice.s qui le demandent,
- Le recrutement des futur.e.s enseignant.e.s ou remplaçant.e.s,
- Les relations avec les familles qui les sollicitent,
- Veillez à la continuité du projet Diwan, l'enseignement par immersion.

En plus de ces missions, et en partenariat avec le conseil pédagogique du premier degré, les services pédagogiques organisent des événements étroitement en lien avec le projet Diwan. Dans ce cadre, ils ont pris des décisions et travaillé sur les projets ci-après :

- Les évaluations du CP et CE1 de l'Etat,
- Le règlement du conseil d'école,
- Les évaluations en breton des élèves de CM1,
- Les réunions locales des enseignant.e.s,
- Matériel pédagogique : manuel de breton du cycle 3 par exemple, ainsi que de nombreux autres supports mis en ligne régulièrement sur le site internet des enseignant.e.s...

**Second degré :**

**Collège de Guisseny :** Il y a un projet de 1 600 000 euros pour réaliser un internat via un portage par l'association Ti an aod, avec des subventions publiques pour 560 000 euros et une capacité d'emprunt validée par les banques de 800 000 euros, 240 000 euros restant à financer. Le dossier est dans l'impasse compte tenu du manque d'implication de la communauté de commune pour l'instant. Pour l'heure, les collégiens vont dormir sur deux lieux différents en dehors de Guisseny.

**Collège de Quimper :** L'internat a déménagé à l'île Tudy. Un projet de création d'internat à Quimper est à l'étude.

**Bak e brezhoneg :** 15 lycéens ont composé l'épreuve de mathématiques en breton en juin 2019. Cette année, il y a eu moins d'échos dans la presse. Début juillet, les associations culturelles ont interpellé le recteur dans un courrier. Il a répondu qu'il était sensible au sujet et une réunion de travail s'est tenue à la rentrée. Le 29 novembre, Jean-Michel Blanquer a déclaré à la radio qu'il permettait de composer les mathématiques en breton, mais il s'est rétracté quelques heures plus tard.

**Bachelouriezh nevez** : Da geñver abadenn gentañ an E3C e klas kentañ ez eus bet arnodet an lstor-douaroniezh e brezhoneg evel boaz. Evit eil abadenn E3C, e skrive ar rektor en ul lizher deizet d'an 11/12/2019 e c'hello bezañ arnodet e brezhoneg an arnodennoù amprouiñ dibaouez a sell ouzh ar c'helenn skiantoù pe ar gelennadurezh arbennigiezh, kinniget e fin ar c'hlas kentañ.

**Lise Gwened** : Pep tra zo prest evit an digoradur e miz Gwengolo. Asantet eo bet debarzhadur hollek an eurvezhioù evit mont en-dro un eilvet klas. Etre 15 ha 18 lisead zo raktreset evit poent. E framm ur gêriad skolioù e vo al lise. Gant-se e c'hello lise Gwened bezañ kevratet adalek e zigoradur. War ober emañ ivez an tuta evit ar skipailh pedagogiezh.

**Kenderc'hel gant ar skoliata el lise** : War ober emañ ul labour war takadoù al liseoù evit rannañ skolajidi ar skolajoù e liseoù Karaez ha Gwened. Gant an dasparzh-mañ e vo gellet kaout un diorren kempouez eus an daou lise.

### **Kelenn :**

Kelenn eo kreizenn stummañ ar rouedad Diwan. Emañ e Kemper. Ar bloaz-mañ eo Anna-Vari Ar Rouz aet war he levez, bez e oa ivez kenurzhierz pedagogiezh ar c'hentañ derez. Erlec'iet eo bet gant Patricia Chorlay.

**Stummadur kentañ ar c'hentañ derez** : (kenstrivadeg kelennerien ar skolioù ha Master micherioù ar c'helenn, an deskadurezh hag ar stummañ). 16 Studier-ez e Master bloavezh kentañ (M1) e 2018-2019. En distro-skol miz Gwengolo 2019, 12 studier-ez e M1 ha 11 studier-ez e M2. Tapet o deus 13 studier-ez ar genstrivadeg e miz Even 2019, 2 o deus daleet o bloavezh staj ha M2. 4 hencher nevez zo bet anvet, ar pezh a ra 6 hencher-ez/kuzulier-ez en holl.

**Stummadur war brezhoneg evit micherioù ar c'helenn** : studier ebet ar bloaz-mañ.

**Stummadur dibaouez ar c'hentañ derez** : stummadurioù dreist holl war ambroug an hencherien a ra war dro ar studierien Master mui azasaat ouzh ar c'helenn d'an holl vugale.

**Nouveau bac** : Lors de la 1ere session d'E3C en classe de première, l'histoire-géographie a été composé en breton comme à l'accoutumé. Dans un courrier du 11/12/2019, le recteur indiquait que pour la deuxième session d'E3C en fin d'année de première, les épreuves de contrôle continu, qui concerne l'enseignement scientifique ou l'enseignement de spécialité présenté en fin de première, pourront se dérouler en langue bretonne.

**Lycée de Vannes** : Tous les voyants sont aux vert pour une ouvertures en septembre. La Dotation Globale Horaire a été accordée pour le fonctionnement d'une classe de seconde. Les effectifs prévisionnels actuels sont de 15 à 18 élèves. Le Lycée ouvrira sous forme d'une cité scolaire collège-lycée permettant la contractualisation du lycée de Vannes dès son ouverture. Le recrutement de l'équipe pédagogique est également en cours.

**Poursuite de scolarité au lycée** : Un travail sur la sectorisation des lycées est en cours afin d'établir une répartition des élèves des différents collèges dans les lycées de Carhaix et de Vannes. Cette répartition permettra d'assurer un développement serein des deux établissements.

### **Kelenn :**

Kelenn c'est le centre de formation du réseau Diwan. Ses locaux sont situés à Quimper. L'année a notamment été marquée par le départ à la retraite de Anna-Vari Ar Rouz qui était également coordinatrice pédagogique du premier degré. Elle est remplacée par Patricia Chorlay.

**Formation initiale du premier degré** : (concours de professeur des écoles et Master métiers de l'enseignement, de l'éducation et de la formation) : 16 étudiant-es en Master 1ere année (M1) en 2018-2019. A la rentrée de septembre 2019, 12 étudiant-es en M1 et 11 étudiant-es en M2. 13 lauréat-es ont eu le concours en juin 2019, deux personnes ont reporté leur année de stage et M2. 4 nouveaux tuteurs-trices ont été nommé-es, ce qui fait 6 tuteurs-trices/conseillers-ères en tout.

**Formation langue bretonne pour les métiers d'enseignement** : aucun étudiant-e cette année.

**Formation continue du 1er degré** : elles ont porté notamment sur l'accompagnement des tuteurs.trices qui accompagnent les étudiants du Master, ainsi que sur l'adaptation de l'enseignement à tous les enfants.



**Stummadur kentañ an eil derez** : 16 stajiad er bloavezh kentañ hag 11 stajiad en eil bloavezh. 3 c'helenner o deus tapet ar C'hafep. Heuliet eo bet mat ar staj distro-skol war 3 devezh.

**Stummadur dibaouez an eil derez** : Degemeret mat eo ar stummadurioù dre zanvez pe dre strollad labour. Stummadurioù evel diskrog-skol ar skolajidi o deus graet berzh. Stummadurioù evit sekretourien an eil derez, stummadurioù war implij ar produioù kimiek e kentelioù skiantoù.

**Stummadur brezhoneg evit an implijidi nann gelennerien** : Emaomp o klask sevel stummadurioù brezhoneg evit implijidi nann gelennerien ar skolioù.

**Saloñs ar studierien** : Perzh e meur a forom henchañ e Sant-Brieg, Brest, Pondi.

### 3. Lusk ar rouedad ha buhez ar gevredigezh :

**Tro Breizh 2019** : E miz Meurzh o doa graet Yann Uguen ha Catherine Guérin tro broioù Diwan : 7 emvod e Breizh a-bezh. Eskemmet oa bet war tem ar merañ arc'hant er skolioù. Un droiad all a vo graet e miz Meurzh ha miz Ebrel 2020.

